

Chanson an Noblans



Airs variés

1

Vit goud petra teufe bro Frans
Mas commandfe c'hoas an noblans,
Taolit mad eur zell a anken
Var eur gommun canton Pleiben.

2

N'em glev mui an habitantet,
Pas de faot 'r republikanet ;
Mes kaos eo krignerien ar zent,
Prest int da grogi gant ho dent.

3

Ar re vras eus ar gommun-ma
Na estimont ket ho nessa ;
Sturiou an noblans ha heuliont,
Ho imita leac'h ma c'hellont.

4

Ar bigotet ha sonj dezo
Lakaat ar re all didanno,
Mes ni, en bro al liberte,
Ne ententomp mui kemense.

5

Revolution ioa diskleriet
Gant ar gwoassa pennou kalet,
Ha felle dezo commandi :
Ne ket c'hoas hirr avoalc'g ho fri.

6

11

Petra dalvefe freo he vreg ?
Lakaat he maliç da redeg,
Rak seul vui an ozac'h ha lop,
Gwassoc'h gwas ar vregic ha c'hop.

12

Eun all gant he dad zo paot saout ;
Kapabl voalc'h da ziuall ar maout,
Pe guir he ze eur c'honseiller,
Kontantoc'h c'hoas ma vije mear.

13

Vit eur zant suc ve kemeret,
Mes enna fad ne fiziet ket,
Rak neb a ra eur min ker flour,
Peurliessa zo eun traïtour.

14

Beza he ma an hini moan,
Ha ia de vele goude koan,
Dies bras hen deus sur kavet,
Veoc ket d'ajen-mear lakeet.

15

Evita da zellet likorn,
He vel piou ha zo kam pe born,
O Frans ! ne teus ket var da c'hiz,
Rak kapabl ve dont da varkis !

16

21

Gant aoun ve ket an oll kontant,
Ar merc'het ha c'hell kavout c'hoant
Da veza lakeat er beden :
Ni ho c'hontanto penn da benn.

22

Beza e zeus re maget mad,
Deus ho c'hig eo leun ho dillad,
Lod all n'int ket tre ker teo,
Ne ket ker melen ho bleo.

23

Pe hint zo pinvidig pe paour,
Ne ruillont ket oll var an aour,
Ar ruz, lar ar bigotezet,
Dlefent ket beza anduret.

24

Merc'het kagot, dalc'hit ho troug,
C'hellit ket troc'hi domp omp goug.
Pe kontant pe ne vec'hu ket,
Ganeoc'h sur n'omp ket nec'het.

25

Poan speret peuz, hac ho pezo,
Defaot ne gommandit er vro,
Lakit, mar karit, daou vragou,
Renoncit neuse d'ho prosiou.

26

Mes ni, en bro al liberte,
Ne ententomp mui kemense.

5

Revolution ioa diskleriet
Gant ar gwoassa pennou kalet,
Ha felle dezo commandi :
Ne ket c'hoas hirr avoalc'g ho fri.

6

Guelomp piou eo ar botret vad
Zo bet n'em lakeat er gombad
Ha voa great a daoliou paper
Vit mont he conseil an ty ker.

7

Demeus ar re divergonta
Eunan teo woalc'h vit hor spounta,
Ne ket ken huel a Goliad,
Coulskoude en deus cofic mad.

8

Kredi a ran en deus speret,
Balamour ze bras he chelet :
Gant ar re all vez en ho fenn,
Goassa den eo ho c'habitenn !

9

Klask ober kentel d'ar re all,
Vit an dra-ze he tigouez fall
Aoun neus ranfek ar soutanen
Roi plaç da baotr ar liviten.

10

Petra e zeo eun tourc'h mene ?
Eun tam brao a lapous he ze.
Vit gout piou neus enleshanvet,
Goulennit piou en deus fouetet.

Dies bras nen deus sur kavet,
Veo ket d'ajen-mear lakeet.

15

Evita da zellet likorn,
He vel piou ha zo kam pe born,
O Frans ! ne teus ket var da c'hiz,
Rak kapabl ve dont da varkis !

16

Neur dremen, guelomp n'hini berr,
Henes zo sur eun denic terr,
Ma vije bet c'hirroc'h he c'har
Neb leac'h nije kavet he bar.

17

Guechal so bet ho kommandi,
An hini a ioa louz he fri.
Ha galvet ha vije fri louz,
Evel ve laret d'eur marmouz.

18

Brema ne kapabl a netra
Met da zikrial he nessa,
Avechou da garga ar foz,
Avechou all ar guele kloz,

19

Tad koz, gant ar blijadur n'oa
Ha stampe, ha rampe, ha ! ha !
Ne ioa ket bet fall he zevez
Pa n'oa ket kollet he vragez.

20

Evit kreski ar garantez
Hen d'voa evitan he vestrez,
Eur c'hloarec zeas er gombad,
Da c'hounit velse eur pris mad.

Ganeoc'h sur n'omp ket nec'het.

25

Poan speret peuz, hac ho pezo,
Defaot ne gommandit er vro,
Lakit, mar karit, daou vragou,
Renoncit neuse d'ho prosiou.

26

Kestion zo eus eur projet ;
Roi droajou neve d'ar merc'het,
Al lezen se, ma teu da benn.
Ho lakefe mest da vodrenn.

27

Mar comsfer din a zimizi,
Ne faot ket klask eunan deo di,
Ouspen karga tout ar guele,
E danjer ve c'hoas va bue,

28

Deiz araok an eleksion
He farbote kals an itron,
Assambli tud an andread,
Laret de voti en tu mad.

29

Ma c'hounid republikanet,
Oll omp riskl da veza daonet ;
Lod vo maleurus er bed me
Ha sur gwoassoc'h c'hoas goudese.

30

Eur seurez gant eur bek prennet.
Euz ar speret-santel karget,
N'em lakas da zirezouni,
Ne vouie petra lare mui.

He chapeled ha zic'hreunas,
Ho klask ober eun tapach bras ;
Ma lare re ioa ho silaou :
« Evet deus sur eur banne traou ! »

Eur vigodez eat e koler,
Zo gwoassoc'h eguet Lucifer ;
Hema ne lar netra da zen,
Ar vaouez ha follo biken.

Vit dont a benn eus ar re ru,
Galvit Alecto eus ho tu ;
Pedit ive Judith ouspenn,
Zo mad tre evit ar re venn,

Ho kounar ho peuz diskarget,
Ho feçoun fall peuz diskuezet ;
Mar vijoc'h goude merc'het brao,
He vez echu ar jabadao.

Ivantet ioa kargou neve,
An telegraf a labore ;
Komis an ankou ioa kavet,
Evit sicour ar vignounet.

Tapet a remp oll bep a tam,
Kouls ar re luch hac ar re gam ;
Bugale Comb e zeo hanvet
Ar re zo republikanet.

Neb ne ket kontant eus he lod,
Mar kar a zono ar c'horn bod ;
Roet vo dezan eur vech all,
Eun tam muioc'h pe kement all.

Pa ioa deis an eleksion,
Kouls an otrou hag an itron

Skrivet ioa zoken er « *Courrier* »
Ato prest da lakat geier ;
Implij rejont ho all armou :
Chomet int berr gant ho ardou.

Destinet ioa an taoliou baz
Da bilat potr ar ruban c'hlaz,
Kousto pe gousto, emezo,
Evit henes sur a zanso.

Mad int da vadeo ar re all ;
Varno ho unan cz int dall ;
Guelet eur blouzen he lagad Pol,
N'ho hini velont ket eur zol.

Prometet ho d'voa kals a draou,
Ha d'ho c'hamaradet kargou,
Mes brema pa ho deus kollet,
En em venji ho deveus gret.

Ar barados vije roet
D'an neb nije vito votet ;
Ganto ioa an alc'houeziou
Ha zigoreche an doriou.

Daoust piou en d'oa ho assuret
Deus ar pez ha ioa prometet ?
Eur zant bras benag, emichans
Deuet da zavetei hor bro Frans.

Sonjet deus ober eun tol mad,
Var ho douar difen ar c'had ;
Eur garde-chass ho deus hanvet
Vit stourm eus ho c'hamaradet.

Ar c'hontrol d'ar pez reer ama,
An nobl helken ha chassee :

Epad eur bloas goud'ho euret,
Mar teu ar baron d'ho guelet,
Ve oblijet ar priejou
Da zansal ha d'ober modou. (Quintaine)

Pa zimez an nobl bugale
Ar paour ha baco adare ;
Pa c'han eur bugel er maner,
Arc'hant a goust da jakes kouer.

Ar païsan keas a ranke c'hoas
Dorna an dour gant eur vaz vraz
Er foz oa en dro d'ar maner,
Evit torri penn ar glesker.

Eassoc'h vije bet ho repoz
Vit ho kana epad an noz :
« Peoc'h breman ! peoc'h ta ! gleskeret,
« Peoc'h d'an otrou mad da gousket ! »

Ouspen an noblans eur rumm all
Da china var paour ioa ket fall ;
Ar woenn-se ne ket c'hoas kollet,
Dreist oll etouez ar Vretonet.

Ne lavaran ket an dekvet
Eus ar seurt traou zo tremenet :
Mar plij deoch n'amser ancienn
N'em lakit en tu ar re venn.

Jalouz int eus ar re dister,
Defaot nemaint oll er viser,
Forcet neuze d'ho adori
Vit kavout bara da zibri.

Ma vez ar re ze ar vistri,
Ni a nefe c'hoas var hor fri.

Tapet a remp oll bep a tam,
Kouls ar re luch hac ar re gam ;
Bugale Comb e zeo hanvet
Ar re zo republikanet.

37

Neb ne ket kontant eus he lod,
Mar kar a zono ar c'horn bod ;
Roet vo dez an eur vech all,
Eun tam muioch pe kement all.

38

Pa ioa deis an eleksion,
Kouls an otrou hag an itron,
Kerkouls ar vros hag ar bragou,
Ar re venn oll ioa he kargou.

39

Mont reent daou a daou da voti,
Aliessoc'h c'hoas ouспен tri ;
Kasset vije yan dre he viz
An noblans vras a ree he c'hiz.

40

Ya, rollet a bep eur vandenn,
Ha kunduet gant ar re venn,
Kals eus an elektourien
Ha votas eneb d'ho c'hreden.

41

Diwallet dreist oa ar buro,
Eus toull an or ha tro var dro :
Eur gardian gant tri lagad
Adr on he gein ha vele mad

Daoust piou en d'oa ho assuret
Deus ar pezh ha ioa prometet ?
Eur zant bras benag, emichans
Deuet da zavetei hor bro Frans.

48

Sonjet deus ober eun tol mad,
Var ho douar difen ar c'had :
Eur garde-chass ho deus hanvet
Vit stourm eus ho c'hamaradet.

49

Ar c'hontrol d'ar pezh reer ama,
An nobl hebken ha chassaa ;
Ar paour ranke lezel'r jibier
Da zibri ed er parkeier.

50

Didan an noblans ar paisan
N'en devoa siouas nemet poan ;
He vuez hag he oll vadou,
He vreg memes ioa d'an otro.

51

Obliget da vont da vala
Ha ive da bozat bara
Da veil ha da forn an otrou,
Arc'hant bras a gouste ataou.

52

Pa vije bet ear lue bian
Pemp liard a bac ar paisan ;
Evit toulla eur punç zoken
He ioa droajou all da c'houlenn.

Ne lavaran ket an dekvett
Eus ar seurt traou zo tremenet :
Mar plij deoch n'anser ancienn
N'em lakit en tu ar re venn.

59

Jalouz int eus ar re dister,
Defaot n'emaint oll er viser,
Foret neuze d'ho adori
Vit kavout bara da zibri.

60

Ma vez ar re ze ar vistri,
Ni a nefe c'hoas var hor fri,
Dont rafe an inkisicion
Foret vemp da vont d'ar sermon.

61

Kenvrois mad, va mignonet,
N'em glevomp, republikanet ;
Diwallomp he teufe en dro
Ar modou gwechal en hor bro.

62

Brema velomp petra hon eus ;
En eut chanch ni hon defe keus,
Rak n'omp ket sur neuse afad,
He zafe tout an traou ken mad.

63

Kentan votadek ha vezo,
Pobl Breiz-Izell, te a voto
Evit ar Republikanet
Ha James vit ar Chouantet !

EOSTIC-KERNEO.